

AR VOT MUNICIPAL

Tud divar ar meaz, ne gredet ket ar gevier a leverer deoc'h :
N'euz gir da zerri an ilizou, na da lemel ho fae digant ar
veleien honest hag a ra ho dever. Eur c'hontrat a zo entre
ar Pap ha Gouarnamant Frans var zo, hag ar c'hontrat ze n'hell
ket beza torret, araog ma vezo kontant an daou du. Euz ar verac'h
nag euz ar seurezed, n'euz gir er c'hontrat ze. Dre ma prezegout
ma kelenmont ha ma reont traou a enep ar Gouarnamant, eo harzet
ze outhei ; mes ken libe int da chom en Frans evel c'honi ha

Enebour ar Vretouned n'eo ket ar Republik, er c'hontrol eo,
a zo oc'h esa mouga ar c'hontrates, lakat brezel ha revolt ?
re wen. Gwelomp pere eo tri enebour bras ar Vretouned. Da
an noblans, d'an eil darn euz ar veleien, d'an drede ar banadha.

Ar Votadeg

Eru eo ar votadeg,
Petra refomp-ni, minioned,
Pevar c'hoste zo dirazomp,
Gant p'hini anhei e trofomp ?
Da genta ema an noblans,
Hag ar re-lek ennhei ho fians,
Pere, brao, ouzoc'h a gomzo
Evit ho tapout n'ho laso.
Hervez ma lavar kals a dud,
An noblans koz ho doa gwal vrud,
Ho mibier, ma vellent mestro,
'Rafen deomp santout ar gwarko.
Poan meuz o kredi kement-se,
Kals anhei zo tud a zoaro.
Komzou braou zo en ho genou,
Gant niver a bromesaou ;
Mes maz afe ho zroad er par,
Hor befe ni poan ha glae'har.
An deok hag ar preuvedu,
Droet ar vorzed, ha droet ar c'hi,
An taillou hag ar c'horveennou,
En noz, pilet ar stankou.
Hon gragez, hon merc'hed iaouank,
Ia, gant noblans despet d'ho c'hoant.

Hirie, deoc'h, lavar ar re wen,
E keront kals ar fourmerien,
E refont kement zo vi'hei
Ma voient holl a du ganthei.
Eun dra hep ken zo en ho fen :
Kas ar Republik da bourmen,
Neus fors petra zeuo goude,
Eun ampereur, pe eur roue.
Digor mad da lagad, Ian Gouer,
Eur pech k brao did a stinier,
Ennhan po defo da dapet,
'Vel ma karfont, did a vo gweot.
Kals ar re nobl zo tud horient,
N'ho leka ket varnout da vest,
Pe vel da dud koz e santi,
Mar deuez varnhei da voti.
Na ra drouk ebet dezhei,
Veldout kleont kaout liberte.
Mes ar pezh a fell d'ar re-ma,
Ez eo kaout tout pe netra.
Dei ho unan ar faveurio,
Ar c'hargo hag an holl blao,
Ha Ian Gouer kaset da bourmen
'Vel eur c'hi divar an dachen.

An eil Enebour

Eil enebour ar vrelouned
 Eo ar beleg m'ar em c'hredet.
 Nan ar beleg honest ha guirion,
 A heuil mad he relijion.
 Ar beleg-ze zo enorabl,
 Senti outhan zo profitabl.
 Mes Alexis, mab ar stouper,
 Fanch-Mari, mab ar pillæouer,
 Tapet ganthei eur zoudanen,
 Na zelfont ken euz kouerijen.
 Boutet ho devez en ho fenn
 Kleont distrei ar Fransijen,
 Deuz ho zud, ho mad hag ho bro,
 Evit ho c'hemer da vestro.
 Alc'hwe 'r barados zo ganthei,
 Hini n'ifern zalc'hont ive,
 Ar purgatoar, pot houarn bras,
 Arc'hant a leiz dhe i a zigas.
 Mes eun dra a vank dezhi c'hoas,
 Evit rei deomp ni fest ar vas,
 Teurel d'an traou ar Republik,
 Hon dorna neuze manifik,
 Var an douar evel en env,
 Ez eo mestrou an Aotrone.
 Al liniez-ze a stouperien
 A glask lakat ar gouerijen,
 Den em drailla evel bleizi,
 Varnhei ma teuf ac'h da voti.
 Unvaniez ar Bizier totu,
 O deuz ivantet ar re du,
 Hini ar bannier, hini ar groas,
 Hag eun niver a re all c'hoas,
 Da skulia ho koad a zo prest,
 Ma leket ar veleien da vest.
 Eun niver zo euz ar rema
 A sik ho fri en kement tra,
 Nemert en ho c'harg a veleg,
 En kement-ze int lezorek.
 Touet ho deuz var an aoter,
 Ec'h erefont kement Ian Gouer,
 Ma tiskaro ar Republik,
 Mho lazo kren en eun taol mik.
 Biskoaz ar re-man n'hen dint bet,
 A du gant ar baizantet.
 Sovetat Rom da genta,
 Eo peden an dud santel-ma.
 Ha lezel ar Frans da greuvi,
 Mert varnhei teufac'h da voti.

An drede Enebour

Trede enebour, Ian Gouer,
 An hini he gas d'ar vizer;
 He gas dalc'h mad enep he c'hoant,
 Eo a dra zur ar guinardant.
 Sioas brema 'r votadego
 A vez groet kals dre vanac'ho,
 Alies bras enep Ian Gouer,
 Ar feurmier hag al labourer.
 Lonka ra 'n den he beadra,
 Koll he vrud mad hag he vara.
 Koll e iec'het evit james,
 Hag he skiant vad alies.
 Nag a bed torfed zo bet groot,
 Zo ken gant kals a dud honest,
 Mestroniet gant guinardant,
 Ha kollet ganthei ho skiant.
 Na pegement a dorfedourien,
 Dre w'nardant kollet ho fenn.
 Zo bet kaset d'ar prisoniou,
 Ganthe ho fallontez, ho c'rimo.
 Aliez, zo ket dre wal chans,
 Ez int be eat var ar potans.
 Ar guinardant a gas hepred
 Millionnou a dud d'ar verred.
 Kals all d'an hospitalliou,
 Hep konta d'an holl glenjejou.
 Ha na heller ket ho iac'haat,
 Ar guinardant neuze devet 'r goad.
 Nag a bed greg ha bugale,
 Ho devez kollet ho bue.
 Gant eur pried, eun tad mezhier,
 Oh digor da lagad Ian Gouer.
 Dreizout da un, n'hen di biken,
 Da rei da vouez da unan gwen.
 Mes pas pezo bet eun daken,
 Te droio 'vel eur benduen.
 Ankouez riz piou ra evidout,
 Rag euz an holl, rez neuze fout.
 En deiz varlerc'h, pa zifunez,
 Ve da galoun leun a ankouez.
 Gredez ken rei fas d'az minion,
 Mez az pezh euz da drahizon.
 Oh ! sonj mad en kement-se,
 Ha chanj da stum, da zoare,
 A ro da vouez er wech-ma,
 D'eur republik an da genta.
 Hep dero'hel kont euz banac'ho,
 Pere da siko el laso.
 Ar veleien hag an noblans,
 A anve mad divar ho sans,

Biken na vo'fet evithei,
 Pe e vefet forset d'ober ze.
 Dre ze e prenont ho mouezou,
 Gant arc'hant ha gant banac'hou.
 Mes sell vel zagr da vouez Ian Gouer,
 Gant eur vouez hep ken ec'h heller,
 N'in ober an eol tom, nag ar glao,
 Mes chanch lezennou fall ar vro.
 Lakat ar reiz'ed holl da ren,
 En plas gizioù koz ar re wen.
 Pebeuz tud ve ar vretouned,
 Ma lakfent n'ho fennou kalet,
 Eo ar re-ze tri enebour,
 Hag a zo zious gwal dreitour.
 Sellet a pezh ra an noblans
 Gant k'ls euz a veleien Frans.
 Ar pezh hellont reont bemde
 Evit esa kaout eur roue.
 N'int ken, guir eo, 'vel gwech-all goz,
 Ho galloud zo kourer er foz,
 Mes dalc'hmad eseont pep tra,
 Evit laz kren Marianna.
 En despet d'ar vad ha deuz groet,
 Ha d'ar pezh a c'hoanta bepret.
 Soan da iec'hed ha da ine,
 Sonj mad ez tud hag en D'us,
 Ha na dro ken gant banac'h'o,
 Mes vot a gailon vit da vro.

Petra e oamp-ni gwech-all ?

Merzerien, esklaved dindan an noblans
 hag ar veleien, pilet, dornet ha krouget
 evel chass ha mad da netra.

Petra omp-ni brema ?

Tud libr en eur vro libr, mad da vont er
 c'hargo hag er plasou kouls hag an no-
 blans, hag alies gwelloc'h evithei ; rag ar
 re-man a zo groet euz goad ru teo, ha ni
 zo groet gant goad glaz tano.

Piou ho deuz chanchet hon stad ?

Hon zud koz, paotred ha na vijent ket
 troet gant banac'h'o ; rag rei a rejont ho
 buez evit chanj hon stad. Kriomp eta :
 ENOR DEZHEI.

Ha viv ar Republik !

(Potr a C'hatekis).

ARAOG AR VOT

Lenn gant evez ar pezh a zo lavaret aze, ha goude sonj mad ar
 pezh ho deuz groet dimp ar re wen. Da genta er brezel gant ar
 Brussianed, ma n'ho dije ket ar re wen forset an ampereur da zer-
 c'hel eun arme en Rom da zifen ar Pab, e vije deud an Itali hag
 an Otruch a du ganeomp, biken na vijemp bet neuze gonezet gant
 ar Brussianed. Delc'het sonj mad en kement-se.

Piou eo ar re ho deuz laket kement a vesk en Frans aboe ar
 brezel gant Boulanger ?

Ar re wen.

Piou a zo bet tost da lakat brezel en Frans gant affer Dreyfus ?

Ar re wen.

Piou a esa iakat brezel sivil en Frans en eur goulenn ma vefe lazet ar Judevien hag ar Brotestanted a zo en Frans daou pe tri million a dud?

Ar re wen.

Piou a zo o tastum an holl beadra en Frans?

Ar c'houanchou, ar re wen.

Sonjet eun nebeut petra oa ar gouant-ma hag ar gouant-zont bre-ma ez euz ugent vloaz? Kazi netra. Petra eo c'hirie? **Eur c'hastel, eur palez.**

Mar teufe ho zol da vad gant ar re wen, e renke an holl mont da goves ha plega d'ar veleien. Dija e leverer ez euz eun nobl bras hag a ro d'he feurmerien billejou da rei d'ar person pa ez afront da govez evit ma hen devezo ar breuven ez eont. Setu aze pelec'h ez omp eru. Pelec'h ez efomp mar lezomp anezhei da vestrou?

Minioned a ouzon oc'h euz er munisipaliteou hag a zo gwen. N'eo ket euz an den e tleet sellet, mes euz ha greden, euz ho oberou. Mar ema a du gant an noblans pe gant ar veleien, evit interest ho pro, hini ho famill, hag hini ho tud, na voted ket a du ganthei.

Neuz gir da vouga ar relijion, na da ober draug ebet d'ar veleien honest ha fur. Eur bobl na hell ket beza hep relijion, nag eur relijion hep he beleien. Ha neuz deud en penn den ebet da ziskar ar relijion en Frans, mes da lezel peb hini da choas an hini a garo, ha da veza lezet trankil d'he fratika.

Votet eta var Republikanet!

Lannion, imprimerie Henry Mauger.